

(311, suite)

Canaouen  
ar Brinig, ar Rigadel, &c...

Var un toy morsallet.

Bonjour, Person ar Brinig,  
Ar C'hocous, ar Ormel,  
C'houi oc'h eus on ho tistriet  
oll rag ar Rigadel;  
Clevit hor moez truezus,  
Dizec'hit hon daerou,  
Mar doc'h qer carantezus  
Ha m'ar lerer er vro.

(312) Diou blac'hig leun a verit  
A zo deus eur devez  
O renta demp eur vizit  
En eur gompagnunez.  
Mari hag he c'hoar Fanchon,  
A barti an de-mañ,  
Ones an ocazion  
Pini ra demp quella.

Mar goeler an duoris  
O tout d'or bizita,  
N'en de nemet dre valig  
D'on debri, d'on laza;  
An diou-ma a vad calon  
O deus on bizitet,  
Ha gant eun attansion  
N'omp boamp get meritet.

(313) Ar mor a zo qer terribl,  
En hoc'h enor chanchet,  
A ziscoe e voa sansibl  
D'ar bonheur d'o goelet;

Ha ni, Brinig hag Ormel,  
A zanse gant ar joa;  
Hor c'herent ar Rigadel  
A rê ar memes tra.

Eun nombr a greg'in brinig  
gant adres remuet,  
A antonas, var vuziq,  
Ar c'henta muruet;  
Ar Roue, ar Rouanes  
Hag an Dofin-royal,  
A deuas a Versailles,  
D'or quelet o tansal.

(314) Mes pa ya quit Fanchonic,  
Petra vo an duoris?  
Cocous, Ormel ha Brinig,  
Chomomp en fong ar mor.  
N'or bo nemet dienez,  
Ha desolation,  
Anni ha tristidig'ez  
Dre oll en hor c'hanton.

N'on deus get a esperanç  
D'o fossedi arre;  
N'en deus nep sort apparanç  
E c'hafemp e bete.  
Inutil en o chomach,  
Cocousigou charmant,  
E brit en ho langach,  
Retornit prontamant.

236

Adieu eta, Fanchonic,  
En despat deomp, adiou;  
Adiou d'ec'h, Marionie,  
Pa bartiit o tiou.

Mar oc'h eus ar gueldet  
Qer buan d'or c'huitat,  
Da viana na deut qet  
Qer crenn d'on ancouat.

Pa vo hor Brinig munut  
Capabl a zantimant,  
E tizpint evel an dud,  
Scriva, leun ha parlant;  
Hag evit gentel g'enta  
E vezo d'e disqet:  
Fanchon, Fanchon a garan;  
Fanchon, deut d'or quelet.

M'omp bijemp bet p'evan droad,  
Pe bet deomp diou-esqel,  
O pijs meur a gannat  
Abeurs ho pobl fidel;  
Mes laqet er c'hreg'en fal,  
Evel en eur prison,  
N'ellomp qer nemet sonjal  
Nos ha de en Fanchon.

Pa erua en Plunet  
Avel divar ar Mor:  
Sonjit en ho mignonet,  
Bourc'hizien an Mor:

An Ormel hag ar Brinig  
Hag o c'herentiach,  
A vo neuze, Fanchonic,  
O rente d'ec'h homach.

(315) Bepret ha bete mervel,  
Qeit a ma vo hanomp,  
Ha Cocous ha Rigadel,  
Sonj ac'hanoc'h or bomp.  
Roit deomp eus ho q'elou,  
Eun de pa zemeset,  
Mar qassimp hor prezanchou  
D'ar fest eus oc'h eured.

(317) Yec'het d'ec'h, Marionie,  
Yec'het d'ec'h ha chang'vad,  
Qement all d'ec'h, Fanchonic,  
Mar chomit en Argoat;  
Mes tostait .... ha m'am c'hredet,  
Tostait da vro an od;  
Eno zo meur a remed  
Ouz an debroun jabot.

(316) Ar c'honif nag ar melvet  
Ne servichont netra  
D'an argoadis anflamet,  
Pa ves fot a vara;  
Mes ar pesqet crog'ennec  
A ve en Arvorion,  
A zalc'h an dud e redez  
D'ober o labourion.

(Vol. II, p. 311-317.)  
14 str. numérotées.